

TUCHENN MIKAEL- Youenn Gwernig

Ar solisted a gan gant Kaelig, al laz-kanañ a gan gant ar violon.

Mintin abred on bet va-unan
Kichen chapelig Sant Mikael,
Ha tro-war-dro ar vrumenn
A stanke din prenestr ar bed

Avel ebet war gern an duchenn,
Na trouz ebet oa tro-war-dro
Ar balan sonn er vrumenn,
Ha war ar brug perlez ar glao

Prennet e oa dor ar chapelig
Met Sant Mikael n'oa ket chalet,
Ha ni hon-daou er vrumenn
Da ganañ brao oamp n' em lakaet.

Mikael ha me da vat o kanañ
Ur gwerz diwar-benn an arme
Soudarded dall er vrumenn,
E pep korn ar Menez Arre.

Met ouzh an oabl an heol a save,
Ken splann ha 'vit ar wech kentañ
Hag ur wech saet ar vrumenn,
N'oa met deñved war ar Menez